

Argaden Sozon.

hoghen burzud ! arru ar Sozon !
Klevet ran an trompill a son !

Arru int pem kant var o listri
pedomp Doue d'on sikouri.

Arru int pem kant en eur vanden,
ha non deus den vit on souten.

Allas ! redomp oll d'ar c'hoajo
groaghe paour bugaligo.

muoc'h digar eo ar Sozon
vit ar goël loenned direzon.

var ar lic'hid e maint pem kant,
Diskennet deus o batimant ;

Tanan, lac'han reont dre r' vro
na den e bed non sikouro.

Otro Gaorin var e varc'h bras
Ha pa neus klevet a saillas

e daoulagat rond en e ben
Evel daoulagat eur gaouën.

hoghen burzud ! piou a heullio
Otro Gaorin dar brezelio ?

ed e trezek ar Forbanet
Gant daou hughent a soudardet.

e kleze bras eus e goste
Skrouinjal a ra e ancane.

ag an oll bop var o daoulin
Pedomp vit an otro Gaorin !

Retorn a ra Gaorin dar gher
ag en hanval eus eur c'higher.

ar goad a ruill dre e vempro
ha voar e dillat ag a stro !

Sonnet Kleyer ar chapello !
ed ar forbanet en o stro !

Ouspen daouc'hant a zo lac'het
a kement all a zo nec'het.

Otro Gaorin ! hoghen burzud !
Enor dide a das oll dud !

Au 35 recto, seulement le titre écrit à l'encre par Penguern : Argaden ar Saozon.